

AN AMZER

GWENER 18 EBREL 1980

NIVERENN 20 4 FAJENN 2 LUR
2vet bloavezh Bep Gwener

Mererezh, Skridaozerezh:
2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON

XVvet KENDALC'H UNVANIEZH DEMOKRATEL BREIZH (UDB)

● Chom en tu kleiz, disheñvel avat diouzh
ar strolladoù all

● Kudenn al labour: un emgann nevez

Nebeut 'zo e oa e Sant-Nazer XVvet kendalc'h ar strollad U.D.B. (Unvaniezh Demokratel Breizh). Ur vloaz a-raok an dilennadegoù evit dilenn prezidant ar Republik, ha da c'houde dilennadegoù Europa, hon eus kavet e talve ar boan teurel ur sell ouzh ar strollad-mañ.

Sant-Nazer.— Wardro 100 a zileuridi eus pep kevread 'zo a oa en em vodet e-pad gouelioù Pask da geñver XVvet kendalc'h U.D.B.

E-kerz an devezhiou-mañ, adnevezet eo bet ar burev politikel ha lakaet war baper meur a steuñv evit an amzer da zont.

Kent, diogelet he deus UDB e vano-hi kengret gant Unvaniezh an Tu Kleiz, hogen, lakaat a raio he disheñvelidigezhioù da vezañ muioc'h anavezet, ar pezh n'he devez ket graet alies betek-hen. Merzet eo bet ivez araokadenn ar strollad; Bez ez eus evel-se, 40 den e karg strewet e-barzh tiez-kêr ar vro, hag un den da vihanañ emañ ur c'hefridi gantañ e-barzh holl gêrioù an tu kleiz ouzhpenn 30.000 a annezidi enno. Arabat ankounac'haat an ezel o sezañ er c'huzul-rannvro. Red a-walc'h eo bet da zilennidi ar c'hostezenn diskouez e oant gouest war dachenn ar meradur, met kalet eo pa vez galloud ar stad o kreizenniñ kement tra hag o lakaat bec'h war gein an dud. Neoazh, kenderc'hel a ra UDB da lavarout ez eo a-enep groñs d'ar sponterezh.

E dibenn al labourioù, stumm-et ez eus bet ur program nevez evit ar bloavezhioù a zeu. Unan eus palioù U.D.B. eo klask stourmerien nevez, met dreist-

holl kregiñ gant kudenn al labour, ha skoulmañ darempredoù gant ar sindikadoù. Pozet ez eus bet ivez ur raktres emren a sell ouzh kudennoù ispisial an ekonomiezh e Breizh. Ha warlerc'h-se, lavaret he deus UDB n'emañ ket ar wirionez gant ar re a gav dezho ez eo Breizh ur vro nebeut a binvidigezhioù ganti, rak teknikoù ar pesketaerezh hag al labour-douar, pe zoken re an ijinerezh n'int ket diwezhat anezho. Hogen, dre m'emañ skeud an trevadennerezh war ar vro, e vez ret dezhi goulenn skoazell digant an estrenvro.

"Ma teu war wel un emrener-ezh araokour en hor bro, ez eo en abeg d'an dislavar etre ar greüsterioù armerzhel ha denel e Breizh, un drevadenn anezhi, hag ahendall, nac'hidigezh he sevenadur hag he fersonelezh" a glozas izili UDB e diwezh ar c'hendalc'h.

Divizet eo bet kejañ gant pobloù all an tiriegezh e-sell d'an dilennadegoù e 1981.

P.K.

DRAMM: 2 ZEN TAPET E NAONED

En aerborzh Naoned Kastell-Bougon, ez eus bet tapet gant ar boliserien daou zen o tont eus Maroko, ganto 2 kg a louzoù-follentez.

Marv eo J.P. SARTRE

Marv eo Jean-Paul Sartre, prederour gall brudet, anezhañ 75 bloaz. Kemeret en devoa perzh e meur a emgannoù sokial, dreistholl e 1968. E levrioù (romantoù ha pezhioù-c'hoari filosofel) o deus graet berzh goude e dezennoù diwarbenn an "existentialisme". Klaf e oa abaoe ar miz tremenet.

encyclopédie bretonne

LANGLEIZ

110 pajenn 30 lur franko

Skrivit da:

kanevedenn

11 straed an Teuzlec'h
rue de la Fonderie
35100 ROAZHON-RENNES

d'an

50

koumananter 1añ

UR BLOAVEZH

adalek bremañ

e vo kaset EVIT NETRA

niv. 2&3 eus «Dielloù ar Framm Keltiek»

koumananter 1añ

KELEIER ETREVROADEL

—Ouzhpenn 10.000 a dud a zo' —E Liberia (Afrika ar C'horn-
e liorzh kannadti Bolivia, e og) ez eus ur gouarnamant
Kuba. Gortoz a reont an aotre nevez goude drouklazh ar pre-
evit mont kuit diouzh o bro zidant William Tolber, ar
ha bezañ degemeret gant broioù sizhun dremenet. Ar soudarded
all. eo a zo bremañ e penn ar vro.
Koulskoude e nac'h, zoken
ma lavarint ar c'hontrol, ar —Divizet ez eus bet e Lisboa
broioù a oa prest d'o zegemer. terriñ al liammoù kenverzhel
Un toulladig eus an dud-se etre Portugal hag Iran. Wardro
a zo bet degemeret avat gant 20% eus an eoulmaen lonket e
Bro-Saoz. Portugal a zeu eus Iran.

—Digwener, da lavarout eo —Emeur e Rhodezia oc'h aozañ
hiziv, ez eus un emvod eus gouelioù ar frankiz, anavezad-
broioù Europa ar C'hornog evit ennet bremañ gant ar Rouantel-
studiañ emzalc'hoù anezho a- ezh Unvan. Da gefiver ar gouelioù
enep Iran. e cheñcho anv ofisiel ar vro, a
Diouzh e du en deus gou- zeuio da vezañ Zimbabwe.
lennet ar prezidant Carter
digant broioù Europa skoazell- —1.400.000 den dilabour e Bro
añ ar Stadoù-Unanet en o em- C'hall: setu ar pezh a zo bet
gann a-enep Iran. lavaret gant ar gouarnamant.

**KONTOU
AN AMZER**

Taolomp ur sell war gontoù hor c'heloù.
E 1979 hon eus dispignet (Here, Du, Kerzu) en holl 1501,38 lur.
E 1980, hon eus dispignet e-pad an tri miz kentañ en holl 4.408,68 lur, da lavarout eo teir vech muioc'h evit tri miz eget e 1979.
Ha n'eo ket ar moulevezh a goust ken ket, met ar frejoù hon eus d'ober e-kichen ar moulevezh.

Se a ra en holl wardro 6.000 lur abaoe derou ar gelaouenn. G kreskiñ ez a avat hor frejoù, dreist-holl pa ne ro ket ar goumananterien gwerzh o adkoumanant. Taolit evezh!

Evit ar pezh a sell ouzh an enkefiadurioù, ez eus bremañ ouzhpenn komananter ha gwerzhet e vez ar gelaouenn en un dek stal bennak, da lavarout eo e vez gwerzhet war dro 30 skouerenn er mod-se. Tammoù bruderezh a vez ivez bremañ, ar pezh a ro deomp un nebeut gwenneien ouzhpenn. Koulskoude e vo ret deomp kavout muioc'h a goumananterien ha muioc'h a vruderezh.
Ma anavezit tud a vefe prest d'ober bruderezh e brezhoneg, lavarit dezho ez eus AN AMZER!

LEVRIOU

roger faligot a vo e roazhon d'ar gwener 25 evit kinnig «Guerre Spéciale en Europe»

D'ar Gwener 25 a viz Meurzh, da 20e30, e vo Roger Faligot e stal "Breizh", 17 straed Penhoet, e Roazhon, o kinnig e levr "Guerre Spéciale en Europe" o tisplegañ kudennoù ar brezel en Iverzhon.

ti Norbert
straed Pariz
Roazhon

BOUED NATUREL

HA MARC'HADMAT

gwin - ed - fourmaj - eoul - amann

.. LEGUMAJ FRESK HEP LOUZOÙ ..

Karotez «Pour» Saladennoù «ha...»

e menaj KERIGONAN

TREGROMBRODREGER

**AN AMZER
KELAOUENN SIZHUNIEK**

KOUMANANTOU

- 12 niverenn (3miz):
Reizh: 18 lur, Studierien, Skolidi: 12 lur, Skoazell: 20 lur
- 24 niverenn (6 miz):
Reizh: 36 lur, Studierien, Skolidi: 24 lur, Skoazell: 40 lur
- 48 niverenn (12 miz):
Reizh: 72 lur, Studierien, Skolidi: 48 lur, Skoazell: 80 lur

BRUDEREZH

- AR BAJENN: 100 lur;
Daou hanter-bajenn: 100 lur.
- AN 1/2 BAJENN: 50 lur;
- AN 1/3 PAJENN: 33 lur;
Ur bann: 33 lur;
- AR 1/4 PAJENN: 25 lur;
- KARREZIOU BIHAN: evit 8, 10, 12, 14 pe 16 lur.

KEMENNOU - BIHAN

- A1 linenn a goust 2 lur.
- 30 lizherenn, gwenn, pe sinoù a zo en ul linenn.

Titouroù, paemantoù:

AN AMZER
Mererezh
2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON

Kont Redek Post: (war anv Decambourg): 25.97V ROAZHON.

AN AMZER

KELAOUENN SIZHUNIEK

Mererezh, Skridaozerezh:
2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON
KRF (Decambourg): 25.97V Roazhon
C.P.P.P. 62319

Krouet e miz Here 1979, ha da gentañ divsizhuniek, eo deuet AN AMZER da vezañ, abaoe ar c'hentañ a viz Genver 1980, ur gazetenn sizhuniek holl-vrezhonek. Moulet e vez war vent vihan.

Kavet e vez e-barzh AN AMZER keleier lies, keleier etrevroadel koulz ha keleier Breizh, hag ivez pennadoù a bep seurt. Embann a ra ivez kemennoù, ha pep tra a sell ouzh ar vuhez pemdeziek e Breizh.

Degemeret e vez ar bruderezh hag ar c'hemennoù-bihan e-barzh

ANV: Ao Dim It
CHOMLEC 'H (degemeret mat e brezhoneg ma 'z oc'h o chom e Breizh)

Koumanantiñ a ran d'AN AMZER evit:
12 niv.: Reizh: 18 lur, Studieren, skolidi: 12 lur, Skoazell: 20.
24 niv.: Reizh: 36 lur, Stud. Skol.: 24 lur, Skoazell: 40 lur.
48 niv.: Reizh: 72 lur, Stud. Skol.: 48 lur, Skoazell: 80 lur.
Adalek an niverenn:

Da gas gant ur chekenn da: AN AMZER
2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON
KRF (Decambourg): 25.97V Roazhon.
SINADUR:

18 Ebril 1980

BREIZH

GOUDE AL LANV DU

D'ar Gwener 11 a viz Ebril e oa an Ao Achille-Fould e bodadeg Kuzul Departamant Ao-dou-an-Hanternoz. Emgannoù politikel a zo bet etre ar berzhidi ha skid ar sokialourien a zo bet degemeret dre ma 'z int ar sulañ. Stankañ toull evit an euzhail a vo graet. Prezidiat ar Republik a zegemero an dileurad vrezhon da vat

d'an 23 a viz Ebril da 4 eur goude kreisteiz ha goude ez aint da labourat gant ar vini-stred all ha gant ar c'hentañ ministr. D'al Lun 14 o deus ar vaered en em lakaet da genlabourat adarre gant ar c'henaozadur enepsoadur, met nac'hañ a reont bepred mont en darempred gant ar velestradurezh.

BERR-HA-BERR

Gwennrann.- Serret ar stal UGECO, a farde dilhadoù soudarded. Divizet eo bet gant renerezh Pariz abalamour da stourmoù ar vicherourien. 210 den a en em gav dilabour.

An Oriant.- En I.U.T., adalek an 2 betek an 8 a viz Mezheven rakstudi "Nerzh an Heol e-barzh an Ti". Frejoù: 800 lur. Munudoù digant "Ijin Tommeg" (Génie Thermique): straed J. Zay, 56100 An Oriant. PG:37.39.33.

Roazhon.- Bet harzet e Dol, goude m'en doa nac'het ober e goñje, Daniel Dumanson en deus paouezet da zebrif e kazarn Foch. D'an 30 a viz Mezheven en doa ar C'huzul-Stad nac'het dioutañ an droed da vezañ objektour a goust-iañs.

Brest.- N'eus komunour ebet ken er c'huzul abaoe m'eo bet addilennet en e bezh. Menel a ra an U.D.B. ennañ memestra (gant ar sokialourien).

MAER TEHILHAG TANALLET

Sant-Nazer.- An Ao Mikael Pabo, maer Tehilhag (Bro Wened), en doa embannet e-barzh levr e gær ur pennad bet skrivet gant un den a nac'h an arme. Tamallet eo bet an daou zen. Peogwir emañ an Ao Pabo stourmer en ur sindikad hag ezel ar c'hostezenn sokialour, o deus divizet e sindikad hag e gostezenn da vezañ kengret gantañ pa vo hemañ dirak lezvarn Roazhon.- (Kensk.)

SPORTOÙ

ABADENNOU MELLDROAD

-Trede rummad:
St. Brest 1/5 SM Caen
A.S. Brest 0/1 Laval
US Menez 1/4 Malakoff
US Konkernev 2/2 Pariz
Sant-Brieg 4/0 Viry-Chatillon
-Pevare rummad:
UCK Gwened 3/0 Ar Geoteg
Velos Gwened 0/0 Cholet
Sant-Nazer 4/0 Luçon
Penmarc'h 2/3 Kemper
Montroulez 1/5 Ansiniz
PTT Naoned 4/2 Getigne
Kemperle 3/1 Kastell-Paol

BERR-HA-BERR

Goulnet hor boa n'eus ket pell d'hol lennerien kinnig deomp ur ger brezhonek evit "téléx". Setu un nebeut gerioù a zo bet kinniget: Hedskrud, Skinskrud, Pellskriv, Pellskrid.

An It Jacq, kannadez Montroulez, he deus skrivet da ministr an Aferioù Diabarzh evit gouzout pegement en doa koustet enklask boutin "Tredan Bro-C'hall" (EDF) e Plogo.

An Ao Drian, kannad An Oriant, ne blij ket dezhañ diskleriadur an Ao Giraud, ministr an Ijinererezh (gw. A.A. niv. 16) a ginnige rabat war an tailhoù tredan evit amezeien ar c'hreizennou nukiell. "An dra-se a zo a-enep da reolenn an egalite e-kenver ar servij foran" emezañ.

Skol Sant-Jozeb, Landerne. Gouel evit ar re a zo bet d'ar 4 a viz Mae. PG:85.02.58.

AN AMZER

2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON
Kelaouenn sizhuniek

Rener ar gelaouenn:
Mark DECAMBORG

KOUMANANTOÙ

3 MIZ (12 niverenn):	
Reizh:	18 lur
Studieren, skolidi:	12 lur
Skoazell:	20 lur
6 MIZ (24 niverenn):	
Reizh:	36 lur
Studieren, skolidi:	24 lur
Skoazell:	40 lur
12 MIZ (48 niverenn):	
Reizh:	72 lur
Studieren, skolidi:	48 lur
Skoazell:	80 lur

KRF (Decambourg): 25.97V Roazhon
CPPP 62319

Niver a skouerenoù moulet
evit an niverenn-mañ: 600

AN AMZER
NIV.24 16/05/80

ROLL
STAJOÙ
HAÑV

Barzhed Breizh
HON AMZER

Sant-Brieg.- Betek fin ar miz e vo e levrroueg-kêr un diskouezadeg: "Barzhed Breizh hon amzer". Kinniget e vo oberennoù R. Hemon, Anjela Duval, Youenn Gwernig, Maodez Glanndour, P.J. Helias, h.a., evit ar vrezhonegerien; oberennoù R.G. Cadou, St Pol Roux, A. Robin, Guillevic, e galleg. Da welout!

KELAOUENNOÙ

Deuet eo er-maez: Pobl Vreizh niv. 122 (Ebrél 1980), Wanig ha Wenig niv. 132 (Ebrél 1980), Armor Magazine niv. 122 (Meurzh 1980), An Nerzh niv. 15 (kentañ c'hwec'h mizvezh 1980 Le Lian niv. 6 (Meurzh 1980), Evid ar Brezhoneg niv. 149 (16 Meurzh 1980).

AN NERZH a zo titl ur gelaouenn hollvrezhonek o tont er-maez div wech ar bloaz. Lies-skrivet eo, nemet ar golo. Kavet e vez en niverenn diwezhañ, a zo hini c'hwec'hmizvezh kentañ 1980, pennadoù diarbenn ar wask vrezhonek, pennadoù sinet Isan Ar Mourous, ha diarbenn Alexis Carrel. Goude barzhonegoù e kaver ur pennad "Pandulenn" skrivet gant Roland Topor, hag ivez "Daou dyp a spered" gant Riec.

AN NERZH a zo ur stagadenn d'ar gelaouenn c'hallek "La Bretagne Réelle", a zeu er-maez bep miz abaoe bloavezhioù 'zo dija.

Evit koumanantiñ d'AN NERZH, skrivit d'ar mererezh: J. Quatreboeufs, Merenieg (Merdri-gnac) 22230. Ar c'houmanant-bloaz a goust 32 lur, hag ar c'hont chekenn-bost a zo hini La Bretagne Réelle: 754.82 Roazhon.

Gant plijadur eo em eus lennet "An tri peskig ruz", ur pennad skrivet gant Naig Rozmor ha skeudennaouet gant Tudou. E-barzh niverenn diwezhañ WANIG HA WENIG eo em eus kavet anezhañ, un niverenn gouestlet penn-da-benn (miz Ebrél) d'ar pesked. C'hoarioù, ur sekred-kegin, ur varzhoneg, "Buhez ar garpenn", setu dre vras ar pezh ez eus tu da lenn ar miz-mañ e "Kelaouenn viziek ar vugale... hag ar re all". Eizh pajenn gant tresadennoù a bep seurt, ur golo melen, istorioù berr ha fentus: d'ar vugale a oar ar brezhoneg pe a studi anezhañ e tle ober plijadur dezho WANIG HA WENIG. Ha n'eo ket ker evit ar gerent: 25 lur evit ur bloavezh (12 niverenn). Ha marteze e c'hellfe ar gerent skoazellañ o bugale d'ober ar c'hoarioù, ar sekred-kegin, hag ur implijout ar brezhoneg? An doare-se a chom an doare gwellañ da lakaat ar vugale da zeskiñ ha da implijout hor yezh.

WANIG HA WENIG: M.L. Fave, Kernevez, 29250 Kastell-Paol. 25 lur ar bloavezh, K.R.P.: (Lena Petton) 682.54L Roazhon. M.S.

MARV EO JEAN-JULES VERNE

Marvet eo e Toulon, d'ar Meurzh 8 a viz Ebrél, an Ao Jean-Jules Verne, mab-bihan d'ar skrivagner meur breizhat.

Keleier-Berr

Klask 'zo war unan bennak ouzhpenn evit ober wardro keleier Radio-Arvorig. Skrivit gant ho kerzh-buhez (curriculum vitae) da: Servij an Abadennoù Brezhonek, P.A.C., bali Clemenceau, Brest.

Brezel ar grilhed-traezh.-Ur vag eus ar Vro Vigouden a zo bet harzet d'ar Sadorn 12 gant ar Saozon, abalamour da vent mailhoù ar rouedoù.



AN AMZER KAN AR BOBL an disoc'hoù... ROIT AN AMZER DA LENN TRO-DRO DEOCH! 50 EVIT UR BLOAVEZH adalek bremañ NETRA ar Framm Keltiek»